

KIMIAD

# AR CHEVALIER ROLLAND

## DE BRIED IZABEL



Red eo, e lavare guechal  
 Rolland, pried tene Isabel :

— « Red eo, me renk partial

- Evit mont d'ann Turki d'ar bresel ;
- Gouëla a res din-me breman,
- A kaon a res din var da veno,
- Eun all abars nemeur aman
- A deui da sec'ha pis da zaëlou. • —

— 10 —

2

— « N'eo ket possubl did e vanken , »  
 — En eur goëla, eme Isabel , —  
 — « Did e vezin da virviken,  
 » A pa ves maro bepred fidel ;  
 » Ma zeufenn da ancounac'hat  
 » Ann ini e m'eus kement caret ,  
 » Ra zeul dirag va daoulagad  
 » En speç da reproch din va fec'het.

3

» Mar demezan var va devez,  
 » Er banket em c'hichenn azeet,  
 » Deut da gass ac'hanon d'ar lez  
 » A lavaret 'vo m' ho pried. »  
 Rolland a zo maro siouas,  
 Isabel e deus kaon hac ankenn ;  
 Neo ker echuet mad ar bloas  
 Ma teuas eur Markis d'e goulenn.

4

E renq, e c'henet, e arc'hant,  
 A zallas calon ann intañvez,  
 Rei a ras e c'hounsantamant  
 Hac assinet e oe an devez ;  
 Ar guerent oll n'em assamblet,  
 Ar banket a gomancas soudenn,  
 Ne oant ket c'hoas peur azeet,  
 Eun Officer zo enn o c'hichenn.

5

Spontus bras a re e velet,  
 Rag er guis-se guisket en ouarn,  
 Evel-se tout oa goloët  
 Kercouls e visach hac e zaouarn ;  
 Ne greden ket sellet e faç,  
 Coulzgoude e d'oa c'hoant da velet,  
 Hac enn eb finval d'eus e blaç  
 Eus Isabel a zelle parfet.

— 41 —

6

Ar mab nevez kenn souezet  
 Eon d'eus lavaret en eur greua :  
 — « Tennit ô kasq, ia me ô ped,  
 » Hac azeet ganemp da leina ; » —  
 E gasq neuze en d'eus tolet,  
 O pebes orrol meurbet c'hoëro !  
 Scrijal a ré tud ann heured  
 Ho velet bisach eun denn maro.

7

En e za plom ar geanteriz  
 A zelle parfet eus Isabel :  
 — Sell, emezan, sell ouzin piz,  
 » Men eo Rolland lazet er brezel ;  
 » Din-me guechall e poa prometet,  
 » A pa zigouesse ganen mervel,  
 » Biken ne kemerjes eun all  
 » A din e vijac'h chomet fidel.

8

» Tud gentil, pa oan en buez,  
 » Ouman a voa va dimezel :  
 » D'euz gane-me breman d'ar bez,  
 » Deud eo an heur e renkes mervel. » —  
 Astenn a ra e zorn pounner,  
 Caër e d'eus erial a deplori ;  
 Gant an douar e zint bet lonket,  
 A c'hoss e e'hlefjac'h ho c'hirvoudi.

9

Ar Markis a zo chomet mantret,  
 Hac a lavar kent partial :  
 — « Ma renk an oll intanvezet  
 » Hirio an deiz caout seurt c'hoari,  
 » Meur a zenn maro a ve gulet  
 » O tont d'ober chalivari. » —

— 12 —

40

Isabel a zeu dy bep bloas,  
 Guisket er c'his mont d'eureuji,  
 O crial ato gonsoe'h goas,  
 Ar speç ne ziskrog moise outi :  
 Abaoue denn, gant aoun mervel,  
 N'eus græt demeuranç er c'hastel.



*Moulet e Montroulez, ru Brest, 36, è ty an Itron J. HASLÉ, e leac'h e caver bep seurt levriou gallec ha bre-zounec. — Diou chanson a nevez composet ; unan voar ar Groaguet a gar lipet ; eun all voar sujet Ar Mekanikou. — Guerziou ha canticou evit ar retrejou. — Buez sant Joseph, mab da Jacob. — Ar Buguel sur da dri bloas. — Collocou familier. — Disput etre an doctor hag ar buguel. — Michel Morin. — Trajedi sant Guillerme. — Almanakou gallec ha re brezounec evit ar blavez a ren — Medalennou, Croachou, Chapeledou, Taolennou, Paper, Plûn, Liou, etc., etc., etc.*

N° — 451 Ebrel 1877.